



ITRON VARIA VULAT

I.

GWERZ ILLIS BULAT.

Zalud, douar Pestivien, brudet en Breiz-Izel,
Gant ho tud-jentil nerzuz ha t'èr 'barz ar brezel,
Zalud, dreist oll da Vulat, brudet gant burzudou,
Gant burzudou ar Verc'hez e kever hon zadou.

Tostik-tost da vourg Bulat, e veler 'n eur braden,
Eun dosen war n'hi broustkoat kelvez, bruk ha raden,
Eno e oe eur c'hastel ar c'haëran diouz ar vro,
Gant koajou braz en peb tu, hag eul lenn tro war dro.

Tud-jentil vad ha zantel er c'hastel-ze ken kaër
A zigemeraz 'liez zant Ervoan Landreger;
Ann otrou Iann Bestivien oa hano ar baron,
Ann Itron Constans Rostren oa hano ann itron.

Med arok-he, pell arok, eur baron diouz ho goad,
Na nevoa bugel abed, hag hen et war ann oad,
Hag a westlaz d'ar Verc'hez mar nije eur bugel,
A westlaz, war he zouar zevel d'hei eur chapel.

Neb en em westl d'ar Verc'hez, na ra ket enn-aner,
Abenn eur blavez goude oa mabik er maner,
Ha zavet prim eur chapel ha hanvet Buguelat,
Aboue neuze ve laret : Itron Vari Bulat.

Ha da Vulat e teue kalz a belerined,
Diouz Landreger ha Leon, Kerne ha Gwened,
Hag ar chapel re vian n'em gavaz arok pell,
Ha setu gret eun illiz elec'h e oa 'r chapel,

Bennoz Doue da viken war hano ann dud vad
A zavas illiz Bulat d'ober d'ar fe krenvat;
Bennoz Doue war hano baroned Pestivien,
War hano beskont Rohan ha baroned Rostren.

D'ann otroune Pont 'N'abbat, Bouttevell, Kergorle,
Bennoz ive zo dleet d'ann eil ha d'egile,
Bennoz d'otrone Molac, ar Chapel, Kerveno,
Marquis ar Gaj ha Kerouartz, bennoz war ho hano.

Goude, daou vestr masoner hag a gare Mari
A zavaz diouz ann illiz tour ha sekreteri;
Pa deuz roet d'ar Verc'hez ho foan hag ho danve,
D'ann daou vasoner zantel, bennoz, bennoz ive.

War ann tour kaër gret ganthe, zo breman eur zêzen,
Ebarz ann er zavet koant, evel eun dantelezen,
Dreist da veneou Kerne he beg a zo huel,
'Vit kement-se trugare d'ann trou Daniel.

Zalud, douar Pestivien, brudet en Breiz-Izel
Gant ho tud-jentil nerzuz ha têt 'barz ar brezel ;
Zalud dreist oll da Vulat brudet gant burzudou,
Gant burzudou ar Verc'hez e kenver hon zadou.

II.

BURZUDOU GWERC'HEZ BULAT.

Stank e ve 'barz ann oablen ar stered d'ar mare,
Stank ive war ann douar gliz ann Env d'ar beure,
Ken stank all ar burzudou gret gant Gwerc'hez Bulat,
Evid zikour ann dud kèz hag evit ho gwellat.

Diouz peb drouk ha peb klenved e bed deut d'ho diwal ;
Diouz ar mor hag ann avel, ann dour hag ann tan gwal,
Digant ar maro zoken, d'euz tennet meur 'hini ;
Mar ne ket awalc'h laret, me a rai testeni.

Galloud Mari aliez ama zo bet diskouet.
Eur vreg diouz a vourg Bulat n'eur puns don a oa kouet,
Epad teir heur a chomaz heb donet war goure,
Ann oll grede oa maro ha den n'he zikoure.

Mes gwestled e d'ar Verc'hez ha kenkent e veler
Korf ar vreg paour o sevel war goure ann dour skler ;
Hag eméz a oa tennet iac'h ha leun a vue,
Hag ann oll a vouez huel a veule Mam Doue.

Eur bugel tost da Vengamp, 'n'eur stank kavet maro,
E oa he vam glac'haret o krial war he dro ;
Gwerc'hez Bulat emezhi, reit bue d'am bugel !...
Setu ar bugel be-mad, biskoaz na oa bet gwel.

Gant eur c'hoz penn magoren kouet a bez-kaër war n'han,
Eur bugel e oa lahet en parouz Locarnan ;
He vam da Verc'hez Bulat hen gwestlaz gant fe vraz,
Ha dirak kalz a destou, ar bugel atvevaz.

Kollet ganthan ar gweled, eur baillif a Garhès,
A zeuaz bete Bulat da bedi ar Verc'hez ;
He zaoulagad a walc'haz 'bars feunteuniou Mari,
Ha ragtal he zaoulagad skleir mad o tigeri.

Goude ar burzud kaer-ze e kever eun den dall,
Kever eunn den dall ive setu eur burzud all :
Eun den a barouz Kerrien, ha da Vulat renet,
He unan, pare, d'ar gêr 'zo bet retornet.

Dalc'het gant drouk izili, ann otrou Lestaurec,
Goude pemp miz, a grede na vije ken barek,
Barek da gavet iec'hed, na barek da zevel,
Iac'het e gant ar Verc'hez 'dal m'e deut d'he gervel.

Eun itron a Goat-huel, pell-zo war he gwele,
Nevoa bet kalz a louzou ha netra na dale ;
Med pedi reaz Mari da derri he c'hlenved
Ha neubed amzer goude ann itron oa zavet.

Digant an Itron Vari e doa bet he goulenn ;
Evit he zrugarekat e oa gret eun dolen,
Eun dolen war n'hi Mari, ha n'he gwele dalc'het,
Ann itron a Goat-huel oc'h c'houlenn ar iec'hed.

Mari Depault hec'h hano, eur vreg diouz a Vulat.
E kreiz genel he bugel a zalc'he da fallat ;
Gwerc'hez, diboaniet ganac'h, a deuz roet d'ho ti
Eur rod-heol kaër alaouret 'lec'h par ann hosti.

Fant Lucas, a Bestivien, peurgollet he spered,
Diouz ann eil parouz d'he ben a c'haloup hag a red,
Ken ben ar fin e bet kouet, e bet kouet en eul lenn;
Med emez-hi : ar Verc'hez d'am zikour e velen!...

'Mèz al lenn pa oa tennet, oa deut he zud gant-hi,
Itron Vari, d'ho kwelet, ama beteg ho ti,
Ama ve kavet ganac'h, oll kement a glasker;
Ar plac'h foll, sioul he spered, a zizroas d'ar gêr,

Eur vreg a Zuault-Quelen, en oa bet eur c'holl braz,
Hec'h c'halon oa glac'haret, he spered a droaz;
En Bulat dirag Mari ha dirag he auter,
A kavaz ive diboan, ha skiant ha douster.

En eur gêr a Blougonver, e oa tan ha moget;
Profet e zo da Vulat, ha set ann tan mouget.
Koulz all, en Pempoul-Goelo, n'eur bern ed krog tan flam,
Ar plouz en dro zo dêvet, ann toc'hat 'zo divlam.

Dom Loeiz ar Berr a Gallac, war eul lestr marc'hadour,
A ie da Rom, pa zavaz avel foll war ann dour;
Al lestr, teulet, disteulet, gant ar mor o lampat,
Paneveit zikour Mari n'ije ket gallet pad.

D'ar Verc'hez e oa gwestlet ha n'eun tôl ann avel
Evel o senti ouz mestr, a zeuaz da devel;
Neuze ann dremenidi, Loeiz ar Berr hag he re,
Da Vari stereden vôr, a ganaz trugare.

'N'Ancien a Blougonver, ebarz ar Flandr'Izel,
A n'em westlaz d'ar Verc'hez, pa oa kreiz ar brezel,
Kant ha kant, ar zoudardet a gouee n'he gichen,
Eun all hag hen a chomaz n'ho zav war an dachen.

Eun den a goste Carhès, n'eur procez dall, en skour,
A bedaz Gwerc'hez Bulat da zonet d'hen sikour,
Goude, pa nevoa gonet, e teuaz da Vulat,
Hag evit prof d'ar Verc'hez, a roaz he zillad.

Eur goaz a Vaël-Pestivien, tiet gant eun noter,
Ama zeuaz da bedi, stouet 'tal an auter,
Eur guitans en oa kollet, traoualc'h d'hen glac'hari,
Ann de warlerc'h hec'h c'havaz a drugare Mari.

En Bulat zo er vered, eur feunteun vraz ha kaër,
Abenn kavet he farez, pell ha pell a glasker ;
Tro war dro d'hei zo zavet magoriou menerez ;
O skarza ar feunteun-ze, 'teu lèz d'ar vagerez.

Stank e ve 'barz ann oablen ar stered d'ar mare,
Stank ive war ann douar, gliz ann Env d'ar beure,
Ken stank all ar burzudou gret gant gwerc'hez Bulat,
Evit zikour ann dud kèz, hag evit ho gwellaat.

III.

KANTIK HA PEDEN DA VERC'HEZ BULAT

DISKAN (War don : *Stourm ann tregont* (Barzaz-Breiz)).

Gwerc'hez Bulat, Itron Vari,
Harzet peb drouk d'hon glac'hari,
Reit dimp bennoz, reit dimp zouten,
Miret n'hon zouez ar fe gristen!

KAN (War don : *Ar re unaned* (Barzaz-Breiz)).

War ar mor braz dianket, e kreiz an noz du-dall,
Ha tro-war-dro, ann avel gant kounar o iudal,
Ann den a vor e grenva he fianz, he beden,
Dirak-han, 'kreiz ann oabl-du, pa 'bar eur stereden.

Rak zur e, goude prestik, e teu sioul ann avel
Hag ar martolod neuze, a-dreuz d'ar mor a vel
He hent hag he sklerijen, 'dont beteg ar porz-mor,
Hag he vag, daoust d'ar gerrek, a n'em gav gant ann nor.

Ni 'zo ive dianket 'kreiz mor ar bed treitour,
Hag en dro dimp o krozal ann avel hag ann dour,
Avel diwar ann ifern ha dour don ar pec'hed,
Du ann oablen, du ann noz, hon c'halon 'zo nec'hed.

Med 'vel eur stereden gaër a-uz da Vreiz-Izel,
Gwerc'hez Bulat venniget, c'houi bar dirag hon zell;
D'hon zrei diwar ar pec'hed 'zo treitour hag a laz,
Paret, paret da bep koulz, stereden ar mor glaz.

Paret dirag ar bugel o sevel 'barz ar bed,
Beteg aman, n'he galon, ar pec'het ne ket bet;
Dalc'het he vue henvel diouz ar wazik dister
A red sioul gant ann draonien hag a ia pur d'ar ster.

Ar iaouankiz, da velet, 'zo kaër 'vel eur rozen,
Med eun aër zo dindan-hi, kuzet mesk ar c'hlazen,
Paret war ann dud iaouank, paret splan 'barz ann er,
Reit d'hê nerz ha sklerijen da zival diouz ann aër.

D'ann tad ha d'ar vam gristen reit sklerijen ive,
Ma savjont ho bugale enn tu gant ar gwir fe,
Ma tiskfont d'he da genta karet Doue ervad,
Beva gant urz ha furnez, ha rei d'ann oll skuer vad.

Dre oll, eneb da Zoue, e zo hirie brezel,
Paret, stereden Vulat, a-uz da Vreiz-Izel;
Miret hon bro da Zoue, miret hon bro kristen,
Ni ho ped a greiz kalon, selaouet hon feden.

Daoust d'ann oll drouk-sperejou, enn dro dimp a nem zerr,
Ni a dremeno divlam, war mor braz ann amzer,
Renet ganac'hu, Gwerc'hez, stered vad ha douz,
Ken e tigo'ro 'vidomp, porz-mor ar baradouz,

ARGALL, BELEK.

Kalon douz a Vari beet ma zilvidigez (*300 devez a induljans*).

IMPRIMATUR :

Brioci, die 30 julii 1892.

M. LE PROVOST,

Vic. gén.

Pardon Itron Varia Vulat a ve ar zul kentan warlerc'h goel ar
Verc'hez miz gwengolo.